

D'an 20 a viz Gouere

- Er Iañ kantved, sant Jozef Barsabbas, lezanvet ar Yon, mab Mari Kleofas, breur Jakez Yaouank, Simon ha Jud. Pa zivizas an Ebestel envel unan eus an diskibled evit kemer lec'h Judaz en o zouez e voe tennet pizenn etre Jozef ha Mazheaz. Ma voe dibabet hemañ, Jozef avat a yeas gant Silas da gas da Iliz Antiokeializher sant Jakez o c'hervel senez Jeruzalem hag e voe diwezhatoc'h, hervez an hengoun, eskob kentañ Eleutheropolis hiziv Beth Guvrin en Israel.
- Er Iañ kantved, sant Timozeos, mab ar senator sant Pudens, breur ar santezed Prased ha Pudenziana ha sant Novatus. Timozeos a voe beleget hag e kreder e kasas ar feiz da Enezenn Vreizh.
- Er Iañ kantved, merzherenti sant Apoliner, eskob Ravenenna. Ganet e Antiokeia e vije bet kaset gant sant Pêr e-unan da Ravenna. Avielañ a reas da gentañ soudarded ha martoloded ar gêr. Ar poanioù a c'houzañvas e-kerzh e abostolerezh a dalvezas dezhañ bezañ kontet e-touez ar verzherion.
- War-dro 305, merzherenti santez Marc'harid Antiokeia eus Pisidia, gwerc'hez ha merzherez, paeronez ar maouezed dougerez. Ganet en un tiegezh pagan e voe gonezet d'ar feiz hag e reas al le da chom gwerc'hez. Dispenn a reas kinnigoù ar gouarnour roman Olibrius he c'hoantae. Hervez he mojenn he devoe da stourm gant an diaoul en em ziskouezas dezhi e stumm un aerouant. Heskinet en abeg d'he feiz ne blegas ket hag en dibenn e voe en abeg d'he feiz.
- E 427, e Kartaga, sant Aurelius, eskob. Par d'ur peul divrall evit Iliz Afrika, mignon da sant Eosten, e vodas alies senezoù, e stourmas enep d'ar baganiezh hag e savas e sez lec'h ma oa bet un delwenn eus an doueez Caelestis pe Tanit.
- E 1900, e Sina, merzherenti sant Leon-Ignas Mangin, jezuist a Vro-Loren, hag e 55 keneil, lakaet d'ar marv evit ar feiz.
- E Breizh, e 1707, an Aotrou François Jagu, lesanvet ar Vikel-Sant, beleg e parrez Sant-Mazhev-Montroulez en eskobiezh Treger.
- E Breizh, e 1720, an Aotrou Maodez-Ronan Cozanet, beleg eus eskobiezh Landreger, misioner brudet evit e c'hred santel, ganet e Langoat, marvet e Kemperven.

D'an 21 a viz Gouere

- Er Iañ kantved, santez Prased. (Lt. Praxedes), gwerc'hez, merzheriet goude 88. Hag hi merc'h ar senator Pudens ha Klaodia, ma komz sant Paol diwar o fenn en e lizher da dTimozeos, e voe badezet, evel he c'hoar santez Pudenziana hag o breudeur ar sent Novatus ha Timozeos, gant an abostol sant Pêr hag en doa kavet bod, evel sant Paol diwezhatoc'h, en o falez e Roma. En abeg da se e voe anvet Hospitium Apostolorum hag ivez Palatium Britannicum en abeg da orin breizhek Kloadia.
- Er Iañ kantved, e Roma, merzherenti sant Novatus, da-geñver heskinadeg Neron, pe neuze diwezhatoc'h a-gevret gant e c'hoarezed santez Prased ha santez Pudensiana.
- War-dro 290, merzherenti sant Viktor Marsilha. Soudard e oa pa zisklêrias e feiz dirak an impalaer Maxilianus. Stlejet e voe war e gein dre straedoù ar gêr ha gwallgaset gant an astud. Kaset d'an toullbac'h e kanttroas e wardourion a voe dibennet pa voe eñ flastret dindan maen-malañ. Ur manati a voe savet dindan e anv gant sant Yann Kasian e 415.
- Er VIvet kantved, sant Arbogast, patrom eskobiezh Strasburg. Lakaat a reas da sevel an iliz-veur a ouestlas d'ar Werc'hez Vari.
- E 1619 e Lisboa, sant Laorañs Brindisi, beleg, lean kabusin, doazhour eus an Iliz. Hag eñ maodiern meur ar Vreudeur Minored kabusined e prezegas forzh misionoù dre holl en Europa, e-tal ar yuzevegezh hag an Islamegezh. Kaset gant ar pab Klemes VIII davet an impalaer Rodolf II e voe anvet gantañ aluzenner ar bagadoù impalaerel hag e voe mignon an dug Mercoeur gwaz an dugez Mari a Bentevr.- E Breizh, e 1794, merzherenti ar gwenvidig Gabriel Pergaud, lean, beleg ha priol abati Beaulieu, damdost diouzh Dinan. Chomet er vro goude divodadeg an urzhioù e voe harzet ha kaset d'an harlu e 1794. Mervel a reas e-doug ar verdeadenn war "Les deux associés" hag e voe

douaret war Enez Aix. Lidet e vez d'ar 27 a viz Eost a-gevret gant merzherion all Pontonoù Roc'hkreñv bet gwenvidikaet en miz Here 1995.

- E Kernev-Veur, war-dro 877, sant Neod, beleg, manac'h. Ezel eus tiegezh ar roue Alfred Veur e voe soudard da gentañ ha da c'houde ez eas da vanac'h en dindan sant Dunstan. Beleget e voe ha sakrist ar manati. Da c'houde ez eas da benitiour e Kernev e peniti sant Gouron e Bodmin. Skoazellañ a reas ar beorion hag e oa mignon al loened.

D'an 22 a viz Gouere

- Er Iañ kantved, ganedigezh en neñvoù santez Mari-Madalen, ar berlouzaouerez. Dieubet diouzh an diaouled gant ar C'hrist Jezuz, en em lakaas en e servij hag e heulias betek ar C'halvar. Bez' e voe an hini gentañ oc'h anavezout ar C'hrist dasorc'het, hag e kemennas an dasorc'h d'an Ebestel o unan. He c'hehelerezh a voe bras-kenañ en abati Vezelay hag er Sainte-Baume e Bro-Provañs lec'h m'he dije echuet he buhez war an douar.

- Er Iañ kantved, ar santezed Suzanna ha Marsela. Bez' e vefent eus strollad ar maouezed a heulie Jezuz (kv. Lk 8,3) hag emañ o arched-maen e-kichen re santez Mari-Madalen ha sant Maksimin.

- Er IVre kantved, merzherenti santez Lewin, gwerc'hez genidik eus Bro-Flañdrez a voe lakaet d'ar marv e Breizh-Veur gant ar Saksoned bagan oc'h aloubiñ ar vro.

- E 668, sant Wandrillh, 668, abad. Ar sae-vanac'h a wiskas e manati Montfaucon-sur-Argonne, ha diwezhatoc'h en em dennas er Jura e Bro-Suis, a-raok diazezañ an abati a zoug bremañ e anv, war ribl ar stêr Fontenelle, nepell diouzh kêr Rouen.

- En Iwerzhon, sant Buzan (Iw. Buadhan), manac'h.

- E 1474, e Roma, ar Pac'hiad Alan a Goetivi, eskob ha kardinal. Ganet e Plouvien pe e Gwineventer e Bro-Leon, e voe eskob Avignon, Uzès, Nîmes ha Dol e Breizh kent bezañ anvet kardinal gant titl Santez-Prased. War e intrudu eo e roas ar pab Nikolaz V iliz Sant-Andrev-de-Mortariis da vroad ar Vretoned en he lakajont dindan baeroniezh sant Erwan. Bez' e voe legad ar pab e-kichen Charlez VII a Vro-C'hall.

- Diazeziged abati kisterkiat Timadeug e 1841.

D'an 23 a viz Gouere

- War-dro 304, e Tras er Balkanoù, hiziv e Turkia, merzherenti sant Sever. Da vare Diocletianus ha Maximianus e voe lakaet d'ar marv da heul ar c'hantener sant Memnon en doa gonezet d'ar feiz.

- War-dro 435, sant Yann Kasian (Lt. Ioannes Cassianus), abad e Marsilha, doazhour ar vuhez vanac'h. Genidik eus Scythia e voe da gentañ manac'h e Betleem ez eas da lodennañ buhez tadoù gouelec'h an Egipt e-kerzh ur pemzek bloaz bennak a-raok diazezañ daou vanati e Marsilha unan evit ar wazed dindan baeroniezh sant Viktor hag egile evit ar maouezed. Miret eo bet e Ensavadurioù kenobitek ha Prezegenoù an Tadoù.

- E 811, e Pliska e Bulgaria, merzherenti sant Nisephor, a-gevret gant keneiled niverus. Gonezet e oa bet kêrbenn Bulgariz a oa c'hoazh paganed anezho gant an impalaer hogen e voe gronnet al lu ganto ha tapet soudarded gristen. En aner e klaskjont o lakaat da zinac'hañ o feiz hag en diwezh e voent lazhet pe lezet da vervel e touloù-bac'h.

- E 1373, e Roma, santez Brijida Sveden, mamm a diegezh ha leanez da c'houde, kenbatromez Europa abaoe 1999. Dimezet yaouank flamm gant ar priñs Ulf e tesavas eizh bugel gant deoliezh hag e sachas he gwaz war hent ar feiz wirion. Goude marv hemañ ez eas d'ober meur a birc'hirinadenn. Tremen a reas e Roma tri bloavezh warn-ugent diwezhañ he buhez er baourentez hag er bedenn. Eno e tiazegas Urzh ar Salver Santel. Grataet dezhi grasoù kevrinel liesseurt ha diskuliadurioù a-zivout Diouzañv ar Salver. Strivañ a reas kalz evit adreizhidigezh an Iliz.

- Merzherion wenvidik Daimiel, reuzidi brezel diabarzh Spagn e 1936, anezho 26 lean ha beleion bet lakaet d'ar marv etre an 23 a viz Gouere hag an 23 a viz Here. Ar gwenvidig merzher Nisefor a Jezuz ha Maria (Vincent Diez Tejerina), beleg gant e bemp keneil ar wenvidion Jozef ar C'Halongù-Sakr (Estalayo Garcia), Epifan a Sant-Mikael (Sierra Conde), Abilius ar Groaz (Ramos y Ramos),

Zakaria ar Gevrinenn Santel Meurbet (Fernandez Crespo), Fuljañs a Galon Varia (Calvo Sanchez), anezho lean eus Urzh ar Basion fuzuilhet er porzh-houarn Carambandal e Kastilha Nevez; Garmon a Jezuz hag a Varia (Emmanuel Pérez Giménez) beleg hag e eizh keneil ar wenvidion Fulub a Galon-Sakr Maria (Valcabado Granada), beleg, Maoril ar Mabig Jezuz (Macho Rodriguez), Jozef a Jezuz ha Maria (Osés Sainz), Jul ar Galon-Sakr (Mediavilla Concejero), Jozef-Maria a Jezuz o vervel (Ruiz Martinez), Laorin a Jezuz Kroastaget (Proaño Cuesta), Anacarius an Hini Dinamm (Benito Nazal), Fulub a Sant-Mikael (Ruiz Fraile) anezho leaned eus Urzh ar Basion bet lakaet d'ar marv e Carabandal Bajo nepell diouzh Madrid ; Pêr Ruiz a Los Paños ha Jozef Sale Pico, eus Breuriezhe beleion micherour eskobiezhel nepell diouzh Toledo.

- E Breizh, er VIvet kantved, santez Sev pe Sevez, a vo lidet d'ar 24.

- Er IVre kantved, merzherenti sant Ravent, beleg, ha sant Razef (Gl. Rasyphé), penitiourion o daou. Hag int breudeur genidik eus Breizh-Veur e oant penitiourion e Macé nepell diouzh Sées e Bro-Sagi (pa voent merzheriet moarvat gant Gothed o kantreal er vro. Gwelet e vez o bez en iliz Macé hogen e voe treuzkaset o relegoù da iliz-veur Bayeux, war-lerc'h e Caen ha da c'houde e Grancey e Champagne lec'h m'emañ.

- En Iwerzhon, e 898, sant Caonchomhrac (Kungevrank), eskob-abad, aet da benitiour.

D'ar 24 a viz Gouere

- War-dro 300, e-kichen lenn Bolsena e Toskana, merzherenti santez Kristina Roma. Goude bezañ torret idolennoù he zad graet gant metaloù prizioù ha roet an tammoù anezho d'ar beorion e voe lazhet, treuztoullet gant biroù.

- Er IVre kantved, merzherenti santez Kristina Tyr. Bez' ez eo unan eus peder fatromez Palermo gant santez Agata, santez Ninfa ha santez Olivia. Goude bezañ jahinet kriz e voe lazhet gant un taol goaf er galon hag hi o vousec'hoarzhin bepred.

- Er VIIvet kantved, santez Sigolen, abadez kentañ Troclar e Lagrav er Pireneoù.

- War-dro 1224, e manati Saint-Trond er Brabant, santez Kristina, leanez, kevrinourez lesanvet an estlammek.

- E 1293, e Sandeck e Polonia, santez Kinga pe Kunegond, merc'h Bela IV, roue Hungaria, nizez santez Elizabed Hungaria, c'hoar santez Yolen, dimezet gant roue Polonia Boleslas V.

Gant he gwaz e vevas er c'hlanded ha goude marv hemañ e reas gouestloù er manati eus Urzh Santez-Klara he doa diazezet.- E 1898, sant Charbel Makhlouf, beleg, manac'h maronat el Liban. Goude ugent vloaz a vuhez-vanac'h kenvez e tibabas ar vuhez benitiour o vevañ er baourentez strishañ, er yun hag en aspedenn gouestlet deiz ha noz da waznezh an Aotrou. Burzhudour e voe a-hed e vuhez, hep gouzout dezhañ zoken, ha muioc'h c'hoazh goude e varv gant marzh an eoul o tont eus e vez o tegas grasoù ha pare d'ar glañvourion.

- E Breizh, er VIvet kantved, santez Sev pe Sevez, penitiourez, c'hoar sant Tudual. Da gentañ manac'hez a-gevret gant santez Koupaia he mamm e manati Langoat, ez eas warlerc'h da benitiourez e-kichen Montroulez.

- E Breizh, en IXvet kantved, sant Gwengalon, manac'h e Redon, diskibl sant Konvoion.

- En Iwerzhon, er Vvet kantved, sant Declan, abad, eskob kentañ Ard-Mór. Badezet gant sant Kolman e avielas ar rannvro a-raok sant Padrig.

- Er VIIvet kantved, merzherenti santez Lewenn (Lt. Lewinna), Bretonnez lazhet e Sussex gant ar Saozon.

D'ar 25 a viz Gouere

- War-dro 44, e Jeruzalem, merzherenti sant Jakez Veur, abostol. Anavezet eo en Aviel evel Mab da Zebedeia ha breur da Yann, kompagnun da Bêr ha da Andrev. Ar besketaerien-se eus lenn Genezared, o devoa klevet galv Yann-Vadezour a-raok en em stagañ ouzh Jezuz, a reas anezho e Ebestel. Hervez an hengoun, e vefe mab Mari Salome, trede merc'h santez Anna evel ma vez danevellet el Legenda aurea. Gant Pêr ha Yann e voe test eus Treuzneuziadur ha Gwallanken hor

Salver. Hervez Oberoù an Ebestel e voe an Abostol kentañ o reiñ e vuhez evit an Aviel, war-dro gouel Pask ar bloaz 44. Hervez an hengoun, da geñver ar Pantekost, e voe deverket dezhañ Keltia evel tachenn abostolerezh hag e teuas betek Breizh Veur gant e vamm Mari Salome hag e dad Zebedea, alias Aristoboulos, anvet eno Arwestl Meur. Dre vürzhud, en IX vet kantved, e voe dizoloet e gorf e Kompostela e Bro-c'hGalizia a zeuas da vezañ pal unan eus pirc'hirindedoù pouezusañ ar gristeniezh.

- En IIIde pe IVre kantved, e Likea (Lycie) e Siria, merzherenti sant Kristof. Hervez e wenzh brudet-kenañ er gristeniezh e oa un doare ramz a voe dieubet eus an diaoul hag en em lakaas e gwazerezh Doue o vezañ treizhour en ur froud herrus. Ur wezh en em ginnigas ur bugel, hag eñ evit gwir ar Mabig Jezuz, o c'houlenn treuziñ ar stêr. Sammet war e zivskoaz e voe souezhet Kristof gant ar ponner ma oa pa lavaras ar bugel dezhañ : "ouzh va dougen eo ar bed a-bezh ac'h eus douget."

- E 1471, ar gwenvidig Yann Sorezh, beleg karmezat. Ganet e Caen eo bet priol meur e urzh hag unan eus he adreizherion bouezusañ ouzh he lakaat da bleustriñ a-nevez reolenn ar C'harmez. A-drugarez dezhañ e voe savet e 1452 urzh ar garmeziadezed (an eil urzh) hag an trede urzh evit al liked. E 1463 e voe savet e Gwened kouent an Teir Vari lec'h ma resevas d'ar 25 Meurzh 1468 gouestloù ar wenzhidigezh Frañseza Amboaz dugez Breizh. Goude bezañ savet karmezioù kentañ Belgia e varvas en Anjev pistriet ma oa bet moarvat e kouent Naoned.

- 13 merzher gwenvidik brezel diabarzh Spagn anezho beleion ha leaned lakaet d'ar marv e 1936. E rannbarzh Toledo ar beleg Pêr ar Galon (Largo Redondo), Félix ar Pemp Gouli (Ugalde Irurzun) ha Benead eus ar Werc'hez del Villar (Solano Ruiz), anezho leaned Pasionisted, fuzuilhet e Urda; An tad Frederig (Charles Rubio Alvarez), beleg, ar vreudeur Prim (Martinez Castillo), Jerom (Ochoa Urdangarin) ha Yann ar Groaz (Eloa Delgado Pastor), anezho leaned eus urzh Sant-Yann Doue, bet lazhet e Talavera de la Reina ; Denis Pamplona, beleg eus Urzh Kloer reoliek ar skolioù relijiel, bet lazhet e Monzon, nepell diouzh Osca en Aragon ; Deogratias Palacios, Lon Inchausti, Jozef Rada, Juluan Moreno, anezho beleion, ha Jozef-Richarz Diez, anezho leaned eostened rekollad, harzet gant an astud e Motril, e-kichen Grenada, ha fuzuilhet raktal er straed.

- E Breizh, Emziskouezadenn santez Anna d'e servijer Iwan Nikolazig e 1624: «Iwan Nikolazig, n'ho pezet ket aon: me eo Anna, mamm Mari. Lavarit d'ho person ez eus bet e-kreiz ar pezh-douar-mañ gwezhall ur chapel, ar gentañ o deus ar Vretoned savet em enor-me, hag e oa nav-c'hant pevar bloaz warn-ugent ha c'hec'h miz pa voe diskaret. Me a fell din e vefe adsavet a nevez rak Doue a fell dezhañ e vefen c'hoazh enoret amañ».

- En Iwerzhon, e 552, sant Nezan (Iw. Neasan), lesanvet an Diagon, abad e-kichen Muimneach,.

- Gousperoù kentañ santez Anna lec'h ma vez lidet evel paeronez.

D'ar 26 a viz Gouere

- Gouel-meur santez Anna, mamm-gozh Jezuz ar C'hrist ha « mamm-gozh ar Vretoned », mamm hor c'henel, *Mater Patriae*, Paeronez Breizh. Pennhêrezh emglevioù ha Grataennoù Doue d'e bobl Israel e c'hanas ar Werc'hez Vari, Mamm Doue.

- Er bloaz 67 pe 68, e Roma, merzherenti sant Erast, keneil an absotol sant Paol. Teñzorer kêr kGorintoz e oa pa'z eas da heul an Abostol da Efezoz (kv Ob 19,22) ac'han e voe kaset gant Timozeoz da vMakedonia. Edont o-daou gentañ e Korintoz pa skrivas d'ar Romaned.

- D'ar 26 a viz Gouere 1947, e kamp-bac'h Dachau, ar gwenvidig Titus Brandsma beleg karmezad a Vro-Holland. Urzhiet beleg d'e bevar bloaz warn ugent e kelennas ar brederouriezh hag ar gevrinouriezh flamank e skol-veur Nijmegen. Kelaouenner e enebas taer ouzh an naziouriezh betek ma voe harzet ha kaset d'ar c'hamp-bac'h lec'h ma tiskouezhas an uhelañ karitez e-keñver an holl.

- War enez Vreizh (Kembre a hiziv), er VIvet kantved, sant Elen, abad Lankarvan (Llancarfan) war-lerc'h sant Kadoù. Roet en deus e anv d'ur barrez e bro-Zol.